

# VAR AR PEOC'H.

Compozet gant an Oñrou VRY.

Var ton : *Patret Loguivy.*

**C**AERA urs deut d'emp a nevez,

Eus abeurs ar Roue !

Joaïssa qêlou

Evidomp' arru !

Deut prest d'en selaou ;

Bezit oll ravisset.

Ne qet ur c'hraç particulier,

Ne qet ur mad dister ;

Mes un abondang

A vad universel

A laqa en Franç

Ar joa ma da sevel.

Ar Peoc'h pel so voa desiret ;

Zo roç deomp ha sinet.

O ! Peoc'h benig'et !

Deut deomp deus an Evon,

C'houi ra oll genet



Ar Rouantelezhou.

Brezel cris, brezel miserabl,  
 Goalen incomparabl,  
 Qerz d'an ifernou,  
 Plaç a drouc hac a bóan,  
 Na deu mui d'ar vro  
 D'on laqât oll en poan.

Na c'houi, Sozon, n'oc'h mui c'hoantec  
 Da velet o redec  
 Goad ar Vretonet,  
 Ho proïs, gouscoude,  
 Pa zoc'h retornet  
 Da, ur guir garante,

Goude ur brezel dirollet,  
 Francisien, disquiset;  
 Spagn, Hollandisien,  
 Russianet ive,  
 Pa zoc'h dianqen,  
 Rentit gloar da Zouc.

Na vo mui a oel nac a gri,  
 Neus mui a enemi:  
 Na vo mui a gloas,  
 A ravach, a anqen,

A bill nac a laz  
Etre ar Gristenien.

Gloar ta dan Drindet e unan,  
Tad, Mab ha Spéret glan,  
Ho tri ur Mæstr mat  
En ho Rouantelez,  
Eno eo e pad  
Ar peoc'h evit james.

Gloar ive deoc'h ha mil bennos,  
Princes ar Barados,  
C'houi laqa da ren  
Eur peoc'h spirituel,  
E calop an den  
Dre vertu ho Pug'el.

Guerc'ho Vari, c'houi ar g'entan  
Patrons er vro-mañ; (1)  
Deoc'h eo an nomach,  
Deoc'h eo an drugar,  
Vit an avantach  
A recevomp hirc.

Bet dch eus truez o vele  
Ho puzale armet.

---

(1) Itron Vari ar Vreiz, Patrons. Mo. roulez.

Ebars en distruch,  
 An cil eus egile,  
 Vel en un diluch  
 O veuzi didrue.

Sinet ar peoc'h ! oll provinçou,  
 Oll rouantelezou,  
 Perac n'oc'h-hu get  
 Demes-our memes fe,  
 Da renta parfet  
 Guir graçou da Zoue ?

Na vouelet get, c'hoareset ges,  
 A-hu ho tienes ;  
 Ar Peoc'h a viro  
 Ho qerent, ho preudeur,  
 N'int mui d'eus ar vro  
 Da rançontr o maleur.

Bremâ ta, mamqu-ha-tadour,  
 E chomo var o tro,  
 Evit o sicour  
 Er c'hlenves, er yec'he,  
 Ha var ha labour,  
 Ar re hoch eus savet.

Bremâ oc'h quit da ziouerc'h.

[ 5 ]

O piejou caret !  
O ! grag'e cristen !  
Deut da veva gante ,  
Vel ma digompren  
Da vugale Doue.

Pet o deus ho buez collet  
Er brezel dirollet ?  
Pet en deus, sionas ,  
Collet o isili ,  
Ha brêma int goas ,  
Hac ho c'herent hac hi.

N'ac a vam g'ez intanvezet ;  
A zo maleiruset !  
Nac a vinoret  
Zo diben, diberc'hen ,  
Ho zadou collet ,  
O nerz hac o souten !

Ganêc'h bremâ, bugaligou ,  
Ho tadou a chomo ,  
Heb beza barnet  
Da vonet d'ar vro bel ,  
Hac eno lazet  
Er gombatjou cruel.

Goude bremã en he anse,  
 An oll, gant graç Doue,  
 A allo pleal,  
 Qit a goll, a berill,  
 Dre reus ordinal  
 En profit e famill.

Brêma, pa vo libr an trafic,  
 E c'hallo ar public  
 Tenna e brofit,  
 Meritet dre e boan,  
 Pêa ha gounit  
 Peoc'h ha muioch diboan.

Plijet gant Doue, pinvizienn,  
 Rei deoc'h sonjou cristen,  
 Ma vo soulajet  
 Deus ho comodite,  
 Ar beorien rentet  
 En goal necessite.

Mar och eus neb truez, pedet  
 Vit ar re decedet,  
 Ho deus er gombat  
 Recevet ar mare  
 En ur mor a voad  
 Evit difen hor bro.

Ar Peoc'h a vezur amitie,  
 A ro prosperite;  
 Ar Peoc'h a ro joa,  
 A gresq ar vertuzioù,  
 Ar peoc'h a bella  
 Proces ha malheuriou.

Neus get evel peoc'h an ene  
 Da servicha Doue,  
 An den trubuillet,  
 Nac an den trubuilus,  
 N'a bossedo get  
 Rouantelez Jesus.

Ret eo caout peoc'h gant hon nessa  
 D'en em santifia:  
 Neus nemet malheur  
 Vit ar te a vezur  
 Enep o breudeur  
 Cassoni dinatur.

Peoc'h santel! presant hep e bar,  
 Chomit var an douar:  
 Deus ar Finister  
 Chasseit ar bresel,  
 Qen particulier

Ha qen universel.

Renit ar Peoc'h er c'homuniou  
 Hac en tieg'ezou,  
 Bremañ da vigen,  
 Renet er gonsianç  
 Dre ar binijen,  
 Pe dre an inoçanç.

Tud a vresel a bep costè  
 Hac a bep çalite,  
 Pa zoch mignonet,  
 Rentit gloar da Zoue,  
 Bezit unisset  
 Bete fin ho pue.

*D'ar Generalet ha d'ar Zouardet a Franç.*

C'houi oll oc'h eus meritet mat,  
 Dre goprach er gombat,  
 Soutenit atao,  
 Dre furnez ha prudanç,  
 Bete ar maro,  
 Ar Rouantelez Franç.

**F I N :**

---

**E Montroulez, e ti LÉDAN, e ru ar Vur.**

